


8N3-3-029

MISION PLOUIDER

(Eus an 6 d'an 24 a viz Choueyrer 1946)

KANTIKOU



PEDENNOU DIOUZ AB MINTIN

En hano an Tad hag ar Mab, hag ar Spered Santel
Evelse bezet graet.

1. M'hoch ador, Doue, va C'houer,
M'hoc'h ador, Jezuz, va Salver,
Me 'zo aman war va daoulin
Vit ho pedi diouz ar mintin.
2. Mil hennoz d'eoc'h, o va Aotrou,
Evit hoc'h holl madoberou :
D'am beza graet, prenet, miret,
Hag en hoc'h Iliz kemeret.
3. Kement a rin, a Javarin,
A c'houzanvin hag a zonjin,
A ginnigan evit ho kloar,
Keit ha ma vin war an douar.
4. Vit pijout d'eoc'h, Salver karet,
Me a dec'ho diouz ar pec'hed,
Hag a heulio piz penn-da-benn
Kement a zo en ho lezenn.
5. Sellit ouzin, o va Jezuz,
Skulhit warnoun grasou nerzus,
Ha dreist pep tra grit ma vo doun
Ho karantez 'barz va c'halon.
6. Gwerc'hez Vari, va Mamm dener,
Bezit atao mat em c'henver;
Ha pa zono eur ar c'himiad,
Deut da gloza va daoulagad.
7. C'houi, va El-Mat, kannad Doue,
Mirit va c'horf ha va ane;
Na lezit ket an drouk-spered
D'am chadenna dre ar pec'hed.
8. Va zant patron, me 'zo eurus
Da gaout hoc'h hano enorus
Pegwir am eus ken bras enor,
Ho pet, truez ouz ho filhor.
9. Va fatronez, me 'zo eurus
Da gaout hoc'h hano enorus;

Ha me ho ped, va maeronez,
Da hancha mat ho Filhorez.

10. Jezuz, Mari ha Josef, itron santez Anna,
Sant Per ha sant Korantin, sant Paol, santez Barba,
Elez ha Sent an envou, me ho ped d'am difenn,
Ma c'hellin gant ho sikour gounit va c'hurunenn.

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eun Doue hepken a adori
Ha dreist pep tra holl a gari.
2. Na dou ket hano Mestr ar bed,
Ma n'ac'h eus abeg vat ebet.
3. Ar zuluou santel a viri
D'enori Doue, d'e bedi.
4. Da dad, da vamm a enori,
Evit pell amzer ma vevl.
5. Ha mir na laz den ebet,
Nag a galon, nag a eted.
6. D'ar pec'hed vil n'en em ro ket,
Dindan boan da veza daonet.
7. Laerez na miret madou den
E gouiziegez ne ri biken.
8. Na gevter na fals-testeni
Mir dirviken na liviri.
9. Na c'hoanta dra luksur pec'hi
Nag e sonj vil n'en em blij.
10. Madou re all na c'hoanta ket,
Evit o c'haout hep gwir ebet.

Setu aze
Gourc'hemennou Doue,
Lezenn a garante
Vit silvidigez hon ene.

GOURC'HEMENNOU AN ILLIZ

1. Ouspenn ar zul a hed ar bloaz
Pevar gouel berz a viri c'hoaz.
2. Klevout a ri mat penn'da-benn
Sul ha gouel-berz an oferenn.
3. Eur wech er bloaz da vihana,
Ei kovesai hep nac'h netra.
4. Ha da Zalver a resevi
Da Bask devota ma c'helli.
5. Yun a ri an daouzek deiziou,
Ar C'horatiz hag ar vijllou.
6. Da zeiz vijll na da wener
Ne zebri kig e nep amzer.

AN ANGELUS

1. Ni ho salud gant karantez,
Rouanez ar Zent hag an Elez
C'houi a zo benniget,
O pia,
Hag a c'hrasou karget,
Ave Maria!
2. Ra vezo benniget Jezuz,
Ar trouez eus ho korf evurus
Kanomp gant an Elez,
O pia,
E veuleudi bemdez,
Ave Maria!
3. Ni ho ped, Mari gwerc'hez c'hlan,
Pa vezimp war hon tremenvan,
Da c'houlen ouz Jezuz,
O pia,
D'eomp eur maro eurus,
Ave Maria!

AN ANGELUS E BREZONEG

1. Hun Arc'hel a-berz an Aotrou
Da Vari 'zigasas kelou
E oa gant Doué dibabet
Da veza mamm Salver ar bed.

Ave Maria...

2. Mari a respontas neuze :
Servic'heréz oun da Zoue !
Ra vo graet d'in, E! benniget,
Hervez m'ho peuz d'in lavaret.

Ave Maria...

3. Hag e kolvevas eur buge,
Dre c'halloud ar Spered Santel
Ha Verb Doué 'n em inkarnet
Etouez an dud en duez bevet.

Ave Maria...

4. Pedit, Mamm zantel da Zoue,
Evidomp holl ho pugale,
Ma vezimp din eus ar grason
A promet Jezuz hon Aotrou.

Gloria Patri...

REGINA CAELI (evit amzer Bask)

1. Bezit laouen evit ato,
Rouanez bro an nenvou,
Lavarit buan kenavo
D'an drubuilh ha d'an daelou :
Jezuz, ho Mab, n'eo muñ maro,
Kanomp e veuleudiou !
2. Alleluia ! pebez joa
D'eoc'h-hui, Mamm a garantez !
D'eomp-ni ivez, alleluia !
Pebez laouenedigez
E wellet goude hor prena
Adarre leun a vuhez !

3. Ya, Gwerc'hez sakr, bezit joalus
Rak Jezuz, ho Mab karet,
'Zo savet beo hag evurus,
Evel m'en doa lavaret,
Grit, ni ho ped, Mamm druezus,
Ma vimp gantan selaouet.
4. O va Doue, dre ho Mab ker,
Da viken beo ha skedus,
Ho peus karget ar bed pec'her
A levezet dudius,
Grit dre Vari, e Vamm dener,
Ma 'z'aimp d'ar vuhez padus.

PEDENNOU DIOUZ AN NOZ

En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel,
Evelse bezet graet.

1. Mui bennoz d'eoc'h, o va Aotrou,
Evit hoc'h holl madoberou,
D'am beza graet, prenet, miret,
Hag en hoc'h Iliz kemeret.
2. O va Jezuz, me a c'houlenn
Kaout diganeoc'h ar sklerijenn
Evit anaout e pet pec'hed
Oun bet, siouaz ! hirio kouezet.
3. Keuz bras am eus, o va Zalver,
Da veza bet eur seurt pec'her :
Gant ho krasou hiviziken,
Me a vevo e gwir gristen.
4. Gwerc'hez Vari, va Mamm dener,
Bezit atao mat em c'henver ;
Ha pa zono eur ar c'himiad,
Deut da gloza va doualagad.
5. C'houi, va El-Mat, kannad Doue,
Mirit va c'horf ha va ene,
Na lezit ket an drouk-spered
D'am chadenna dre ar pec'hed.

6. Va Zant patron, me 'zo eürus
 Da gaout hoc'h hano enorus,
 Pegwir am eus ken bras enor,
 Ho pet truez ouz ho filhor.

(Ar merc'hed a lavaro)

Va fabronez, me 'zo eürus
 Da gaout hoc'h hano enorus;
 Ha me ho ped, va maeronez,
 Da hancha mat ho filhorez.

7. Jezuz, Mari ha Joseph, Itron santez Anna,
 Sant I'Per ha sant Korantin, sant Paol, santez Barba,
 Elez ha Sent an nenvou, me ho ped d'am difenn,
 Ma c'hellin gant ho sikour gounit va c'hurunenn.

4. — AN AKTOU

1. Kredi a ran
 Kement zo merket gant an Iliz,
 Kredi a ran,
 Rak ar Wirionez he-unan,
 Eur Mestr gwirion eo a zesk d'ezi
 Kement a ginnig d'in da gredi,
 Kredi a ran.
2. Me a esper,
 Doue, ho kras hag hoc'h eürusted,
 Me a esper
 Rak ne d'eot ket enep ho ker,
 Pa 'z'int bet d'in ganeoc'h prometet,
 Pa 'z'int gant Jezuz d'in meritet,
 Me a esper.
3. A ! me ho kar
 Dreist kement tra, va Mestr, va Doue,
 A ! me ho kar,
 Dre ma 'z oc'h mat ha leun a c'hloar;
 Karout a ran va nesa ive,
 Abalamour d'eoc'h o va Doue :
 A ! me ho kar.

11. — EURUS AN HINI

1. Eürus an hini a garo Doue
 Eus e holl galon hag e holl ene.
2. An den a blijo da Zoue hon Tad
 A vo diwallet ha diwallet mat.
3. En ti hag er park, dre holl, deiz ha noz,
 Mestr ar bed warnan a skuilho bennoz.
4. Gantan e bried hag e vugale
 O do perz bepred e bennoz Doue.
5. Evel eur wezenn douret he gwriziou,
 E tougo frouez, deliou ha pleunioù.
6. Ma z'eo pinvidik e ray vad d'ar paour,
 E zorn a vo prest atao d'her zikour.
7. Ma 'n deuz ket danvez, en deus katz gwelloc'h
 E galon zo yac'h, glan ha leun a beoc'h.
8. Diouz c'houezenn e dal e tebr e vara,
 Goude sin ar groas, hep klemm a netra.
9. Laouen er vuhez, laouen er maro,
 Gant an Elez vat d'an nenv e pigno.
10. Evidout, pec'her, n'eus ken da c'hedal,
 Nemet buhez trenk hag eur maro fall.
11. Pec'her, deus en-dro, deus en-dro buan,
 Rak ganit dija eman c'houez an tan.
12. Kemer, hepdale hent ar Baradoz,
 Pe, m'hel lavar d'it, e kavi malloz.

12. — MEULOMP HOLL

Diskan : Meulomp holl da viken
 Jezuz, gwir Doue, gwir den ! *bis*

- | | |
|--|---|
| 1. | 2. |
| Me ho meul, o va Jezuz,
D'houi ho peus va c'hronet,
C'houi ho peus va frenet,
C'houi am mag, o va Jezuz ! | Mil bennoz d'eoc'h, o Jezuz,
C'houi a zo va fastor,
C'houi a zo va zenzor,
C'houi zo va holl vad, Jezuz. |

3.

Kalz am eus pec'het, Jezuz,
En amzer drémenet ;
Pa z'oun bet pardonet,
Me 'vo fidel d'eoc'h, Jezuz !

4.

Bennigit, o va Jezuz,
Va c'horf ha va ené ;
Va mirit noz ha de
Ouz kement droug zo Jezuz !

5.

Hastit buan, o Jezuz,
Torrit va jadennou ;
Ah ! pegoulz en nenvou
Ho meulin-me, va Jezuz !

6.

Ra vezo meulet Jezuz
Dre holl e pep mare ;
Ni bemnoz ha bemde
Meulomp holl meulomp Jezuz

14. — GWERZ AR ZUL

1. Dalc'hit sonj mat, kristenien, ez euz eun deiz santel
A zeu dre zon ar c'hleier, bep sizun, d'hor gervel
Da vont d'an iliz parrez vit meuli hon Aotrou ;
Ha goulenn grasou nevez e-harz an aoteriou.
2. An deiz-se zo benniget, sakr eo dreist ar re all,
Neb a zeuy d'ie brofani ne vo ket didamall
C'houec'h dervez 'zo d'al labour, unan zo d'an ene ;
An den en deus c'houec'h dervez, ar zul 'zo da Zoue.
2. Gant glac'har hel lavaran, war meur a zigarez
Kalz tud a zisprij Doue hag a glask e laerez
War vor koulz ha va zouar ez eus meur a hini
N'ouzont mui nag ehana, na senti na pedi.
10. Sonj'it er vat, va breudeur, ret eo bennoz Doue
Warnomp ha war hol loened, war hor parkou ive ;
Sentomp eta ouz Doue, bep sul deomp d'an iliz,
Hag hor bezo neol skedus, glao pinvidik ha gliz.
11. Hag hor bezo baradoz goude fin hor buhez,
Hag e kievimp gant dud kantikou an Elez,
Rak eur zul dreist pep hini eo an eternite,
Eun iliz dreist pep iliz eo palez kaer Doue.

16. — ME ZO KRISTEN

Diskan

Me zo kristen, setu eno
Va esperans, va c'hanaouenn,
N'euz ket er bed kaeroc'h hano ;
Me zo kristen ! Me zo kristen !

1. Me zo kristen ! Mab oun da Zoue,
Ouz e lezenn 'fell d'in senti ;
Dre nerz e c'hras ez ay va ene
D'ar baradoz, hras dudi !
2. Me zo kristen ! Breur oun da Jezuz,
Da Jezuz-Krist, Salver ar bed ;
Evidon-me e Wad presius
War ar C'halvar en deus redet.
3. Me zo kristen, ar Spered Santel
Ennoun eun templ en deus savet.
Kerz pell, Satan ! Ar pec'hed marvel
Templ va ene ne zaoiro ket.
4. Me zo kristen ! Mab oun d'an Iliz :
Bepred karin eur vamm ken mat.
Vib stourmin gant feiz, vailhantiz,
Vel eur zoudard kreiz ar stourmad.
5. Me zo kristen ! Mab oun da Vari,
Mab he daelou e tal ar groazi ;
Tridal a ran pa zontan enni,
Hak e kanan nerzusoc'h c'hoaz.

18. — KRISTENIEN DA VIKEN

Diskan

D'hor Mamm zantez Anna,	Ni a zo daoulinet
D'an Itron Varia,	D'razoc'hc'houi, Gwerc'hez.
D'hor Zalver benniget,	2.
Ni 'vo fidel bepred	Kurun hag avel foll
1.	Warnomp zo dirollet,
Hor c'halon baour mantret	Hor bro zo vont da goll :
Gant glac'har hag enkrez,	Truez ! Mamm benniget.

3.
 Lezenn Doue gwechall
 A rene kaer er vro ;
 Gwall-youlou an dud fall
 He stlej eeun d'ar maro.

4.
 'Vel eur vandenn chas mut,
 Gant Kounar, noz ha deiz,
 Emaint e-touez an dud
 O klask mouga ar feiz.

5.
 Ni 'zo gwir gristenien,
 Krouadurien Doue,
 Savet en e lezenn,
 En e zoujans ive.

6.
 Ni zo gwir gristenien,
 Prenet gant gwad Jezuz,
 Maget dre c'hourc'hennenn
 Gant e gorf presius.

7.
 Kristenien hor baniel
 A zo kroaz hor Zalver ;
 Ni her zav soun, n' uhel
 Bemdez, e pep amzer.

8.
 Mirit hor bugale ;
 Grit ma vezint desket
 Da garout o Doue,
 Da veva fur bepred.

9.
 Sempl, dinerz, ken bihan
 Ma ne vent diwallet,

Abred, hep kalz a boan,
 Da goll e vent kaset.

10.
 Petra dalv gouiziegez,
 Ma kollomp hon ene ?
 Ar skiant, ar furnez
 A zeu d'eomp euz an nenv.

11.
 Gwechall hon tadou koz,
 Brudet 'vit o furnez,
 A glaske 'r Baradoz,
 Araok pep gouiziegez.

12.
 Skianchou 'zo netra,
 Fa 'zeont enep Doue ;
 Ni fell d'eomp dreist pep tra
 Savetei hon ene.

13.
 Gwerc'hez hor Mamm zantel,
 Roit sikour hep dale,
 E plegou ho mantell,
 Kuzit ho pugale.

14.
 C'houi a zo gallouduz
 War galon hor Zalver ;
 Bezit, madeleuz
 C'houi, zo eur Vamm dener.

15.
 E pevar c'horn ar vro
 Neuze ni holl, Gwerc'hez
 Betek eur hor maro,
 Ni a gano bemdez.

20. — DA FEIZ HON TADOU KOZ

Diskan

Da feiz hon tadou koz, ni pôtred Breiz-Izel,
 Ni 'zalc'ho mat ato ;

'Vit feiz hon tadou koz hag en-dro d'he baniel,
 Ni holl en em stardo ;
 Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho,
 Kentoc'h ni a varvo ! (3 gw.)

1. D'ar c'hrouadur bihan, e kichenig e gavel,
 E lakit eur vamm vat, en deiz evel en noz
 Er boan hag en anken, hi a daol buan eur zell
 War groaz santel Jezuz, he sonj'er baradoz.
2. D'ar pôtr, d'ar plac'h yaouank, c'houi 'ziskouez hent
 C'houi 'lavar : « If gantan hep krena dirak den, ar furnez
 Bezit tud yaouank Breiz, bezit epad ho puhez
 Ato gwir gristenien, treitourien birviken ! »
3. D'an den koz gwenn e benn, e korn an tan azezet,
 O skuilh daelou a geuz war e amzer genta,
 War-lerc'h kalz a boaniou, c'houi 'lavar, Salver karet
 Er baradoz e vo eur usted evitan.
4. D'an den diwar ar maez, kenkoulez ha d'an den a vor
 C'houi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato ;
 Gouzout a reont en nenv e kavint holl dor zigor :
 Ar vuhez 'vo bet tenn ; d'an drubuilh kenavo !

21. — GALVADENN DOUE

1. Eun Doue a zeu d'ho kervel
 Ha da ginnig d'eoc'h pardon ;
 Diredit d'an iliz santel
 Da rei d'ezan ho kalon.

Diskan

- Tostait buan, kristenien,
 Sentit ouz mouez Doue ;
 An deiz-man dreist-holl vo laouen
 Ha pinvidik d'hoc'h ene ?
2. Digor eo divrec'h hor Zalver
 D'ho starda gant karantez,
 Rak glac'har gwirion ar pec'her
 D'an nenv holl 'ro levenez.
 3. Chadennou pounner ha mezuz
 A bouez warnoc'h matteze,

Tec'het oc'h, siouaz! diouz Jezuz...
Distroit en han ' Doue!

4. Ha pa vec'h evel eur wezenn
Hep na deliou na frouez,
Dre zour nerzus ar binjenn,
C'houi a vleunio a-nevez.
5. Diganeoc'h Doue ne c'houlenn
Nemet kabut boantez vat,
Ha krial dre nerz ho pedenn,
Pardon d'in, pardon, va Zad!
6. Ma klevit hirio ar vouez
A ginnig d'eoec'h baradoz,
Selaout... Fall-fall aliez
E vez d'ar pec'her gortoz.
7. Va zikourit, Gwerchez Vari,
Da walc'hi net va c'halon,
Grit ma c'hellin heulh a-zevri
Penn-da-benn ar mision.

23. — ALI D'AR PEC'HER DA ZISTREI OUZ DOUE

Diskan

Poent ez eo d'eoec'h pec'her, *bis*
Distrei ouz ho Salver.

1. Digorit pelloc'h dor ho kalon
Da Grouer ha Mestr pep-unan;
Hir amzer 'zo, evel eur mignon,
E sko, e sko... ha ne rit van.
2. Penaos, va breur, vit kaout an tanva
Eus bara c'houero ar pec'hed,
E falfe d'eoec'h da viken gwerza
Hoc'h ene paour d'an drouk-spered?
3. Dre nerz Doue hag e vadelez
Hoc'h eus gwelèt ar sklerijenn;
Daoust hag ennoc'h e c'houezas buhez
Evit pec'hi, ha netra ken?

4. Taollt evez, atao war ziskenn
E za hent risklus ar pec'hed,
Puns an ifern 'zo en ho kichen,
Ha koulskoude ne welit ket!
5. En ho kreiz, Satan en e zaou-bleg
A guz ouzoc'h stad hoc'h ene
C'houi, emezan, 'zo beo-buhezek...
— Nann maro oc'h dirak Doue.
6. Warnoc'h eo savet eun donn pounner:
Tec'hit... ar c'henta ar gwella
Didruet e vezo ar barner
Kaiz tud, siouaz! her goar dija.
7. Emañ dibrenn an nor a druez,
Dreizi kerzit da gaout Jezuz;
Jezuz ho stardo gant karantez,
Hag Hen ha c'houi 'vo evurus.

24. — ARAOK AN TAOLENNOU

1. Diredit holl d'an taolennoù
'Zo mellezour an eneoù,
Hag a lavar da bep hini
Ar wirionez hep damantiz *bis*
2. Daou hent a zo, daou hent hepken,
Emañ digor dirak pep den
Hent an ifern, hag hent an Nenv,
Hent ar maro, hent ar vuhe.
3. Hent an ifern, frank ha ledan,
Dre ar pec'hed a gas d'an tan;
Darempredet eo bet atao
Gant kaiz a dud, siouaz d'ezo!
4. Ourgouilh, kounar, luksur, avi,
Avaristed ha diegi,
Gant ar vezventi millget,
A ra e-leiz a dud daonet.
5. Breman eo d'eoec'h teuler evez,
Lakaat urz vat en ho puhez,
Koil hoc'h ene eo koll pep tra...
Re ziwezat e ve lenva.

6. A-greiz kalon hag hep gortoz,
Kemerit hent ar Baradoz,
Kimiadit krenn diouz ar pec'hed,
Ha c'houl' gerzo hep nec'h ebet.
7. Rak ganeoc'h e vezo Jezuz,
Ha gantan c'houl' a vo eürus :
Eürus er bed dre nerz e c'hras,
Hak en Nenvou eürusoc'h c'hoaz.

27. — TREMEN 'RA PEP TRA

1.
Selaou va breur ker,
Buan 'red an amzer,
— Tremen 'ra pep tra;
Nerz, madou, yec'hed,
Yaouankiz hag gened :
Tremen 'ra pep tra. (bis)

2.
Skeudenn da vuhez
Eo al lestr a welez,
— Tremen 'ra pep tra;
He roudou er mor
'Zo kloz a-vec'h digor;
Tremen 'ra pep tra.

3.
Deiziu presius,
Grasou gwella Jezuz,
— Tremen 'ra pep tra;
Eur wech tremenet,
En-dro ne zeout ket :
Tremen 'ra pep tra.

4.
Tud skanv ha distur
A glask ar bljadur,

— Tremen 'ra pep tra;
Fnoz o fringal,
Ware'hoaz er bez tenval;
Tremen 'ra pep tra.

5.
Tud devot tentet
Kalon na gollit ket,
— Tremen 'ra pep tra;
Fin 'vo d'ar brezel,
C'houl' gavo peoc'h santel
Tremen 'ra pep tra.

6.
Berr eo pep dervez,
N'eo ket hir ar vuhez,
— Tremen 'ra pep tra;
Klaskomp hep dale
Savetel hon ene;
Tremen 'ra pep tra.

7.
Kant vloaz ha mil bloaz
A ve disterik c'hoaz
— Tremen 'ra pep tra;
Nemet c'houl, Doue,
Nemet an eternite,
An eternite!

32. — GWERZ AN IFERN

1. Diskennomp holl, kristenien, en ifern da welet
Doare meurbet estlammus an eneoù daonet,
'Zo eno, dre wir, Doue, dalc'het e-barz an tan,
'Vit beza graet gwall-zispign eus e c'hras er bed-man.
2. An ifernn zo gun toull doun, leun a denvaljenn,
E-lec'h ne weler morse eur berad sklerijenn;
An norioù 'zo bet serret ha prenet gant Doue,
Ha ne zigorint biken: kollet eo an alc'houe.
3. Tan an ifern 'zo c'houezet dre nerz kounar Doue,
N'hell ket beza mouget, ne gollo nerz morse;
Ennan an holl dud daonet da vilken a jomo :
Hep ehana d'o leski, morse n'o distrujo.
4. Ma 'z eo ken kriz 'vit ato chomm da leski en tan,
An dud daonet koulskoude a danvo gwasoc'h poan:
Dalc'het 'vint pell diouz Doue, goude beza gwelet,
E spont ar varnedigez, e splander dispaket.
5. Klevit ar fals-pinvidik o ouela gant enkreuz :
« Truez, o tad Abraham, en han' Doue, truez !
Ha c'houl, Lazar, diredit, en dour soubit ho piz,
Hirio 'man el levenez, ha c'houl 'zo 'barz an tan. »
6. Breman pa 'z omp kentellet, ni a daolo evez :
Bevomp e doujans Doue hag en e garantez.
Ar vuhez a dec'h buan, ar maro 'zo en hent;
Diwallomp diouz an ifern ha bevomp evel sent !

33. — GWERZ AR PURKATOR

1. Allaz ! ne oufe den kompren
Pegen estlamm eo hon anken
Hor pinijenn a zo kalet :
En han' Doue hor zikouret !

Diskan

- Grédeur, kerent ha mignoned,
En han' Doue, hor zelaouet,
En han' Doue, hor zikouret !
2. A bep tu d'eomp n'eus nemet tan,
Tan war c'horre ha tan dindan;

C'houi hon eus-ri kement karet,
En han' Doue, hor zikouret!

3. Sonjit en ho tad, en ho mamm
Er purkator e-kreiz ar flamm
Va mah, va merc'h a! estouet...
En han' Doue, hor zikouret!

4. Ni n'hellomp dre hor pedennou
Distan na berraat hor poanious,
Doue ouzomp ne zelaou ket!
En han' Doue, hor zikouret!

5. Evit digoll justis Doue,
Evidomp, a! pedit bemde,
Grit aluzenn, mar hor c'haret,
En han' Doue, hor zikouret!

34. — KANTIK AR BARADOZ

1.
Jezuz pegh bras 've
Plijadur an tene,
Pa vez e gras Doue
Hag en e garante.

2.
Berr kavan an amzer
Hag ar poanious dister,
O sonjal dez ha noz
E gloar ar baradoz.

3.
Fa zellan en nevo (u)
Etrezek va gwir vro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmig wenn.

4.
Pa vo pred ar maro,
Neuze me 'gimiado
Diouz ar c'hig ankenius
Enebour da Jezuz.

5.
Gortoz a ran gant joa
An termen diweza
Mall am eus da welet
Jezuz, va gwir bried

6.
Kerkent ha ma vezo
Torret va jadenno (u)
Me n'em zavo en er
Evel eun alc'houeder.

7.
Tremen a rin al loar
Evit pignat d'ar c'hloar,
Dreist an heol, ar stered,
Me a vezo douget.

8.
Bat pell diouz an douar,
Traontenn leun a c'hlac'han,
Neuze me 'ray eur zell
Ouz va bro Breiz-Izel.

9.
D'ezl me 'lavaro :
Kenavo d'it, va bro!
Kenavo, bed poanious,
Gant da vadou tromplous.

10.
Kenavo da viken,
Paourentez hag anken,
Kenavo, pec'hejou,
Trubuilh ha klenvojou.

12.
Goude pred ar maro,
Gant joa me a gano :
Torret eo va jaden,
Ha me libr da viken.

13.
A bep tu pa zellin,
Kement tra a wellin

A ray d'am daoulagad
Ha d'am c'halon mill vad

14.
Doriou ar Baradoz
Digor ouz va gortoz,
Ar Zent, ar Zentezed
Deut d'am digemeret.

15.
E-Kreiz an enoriou
Hag ar meuleudiou,
E vin digemeret
E palez an Dreinded.

28.
En holl boanious kalet
A gorf hag a spered,
Me 'zonjo dez ha noz
E gloar ar Baradoz.

39. — AN DIAOUL MUT

1. Pa zaoulinomp evit kovez,
Hon enebour 'zo war evz,
Eman tostik er c'hostez kleiz :
Diwallit mat, pec'herien geiz!

2. Hanvet ez eo bet an Diaoul mut,
N'eo ket hep gwir en deus gval vrud :
Iferniet 'n deus kalz tud, siouaz !
Ha kalz re all a gollo c'hoaz.

3. Derc'hel seizet teod ar pec'her,
Setu eno e holl vicher ;
Keit ha ma nac'her ar pec'hed,
Her gout a ra, pardon chet.

4. Kaer ho pere yun ha lenva
Ha lavaret mea culpa,
Eur pec'hed kuzet er galon
N'en devo biken ar pardon.

Hag ho pefe graet kant torfed,
 Mar kosevait, oc'h pardonet;
 Grit eur pec'hed marvel hepken,
 Mar hen nac'h lit, pardon biken.

- II. An diaoulou mut gant o ardou
 A zalc'ho serret ho kinou,
 Ha rentet mut en ho puhez,
 C'houi 'varvo mut... Taolit evez!

41. — DOUE GWIR BRIED

Diskan

Gwerc'hez benniget
 Mamm druezus,
 Me am eus lazet
 Dre veur a bec'hed,
 Me am eus lazet
 Ho mab Jezuz.

1.
 Doue, gwir bried
 D'an eneu,
 C'houi 'peus va c'hrouet,
 C'houi 'peus va frenet,
 C'houi 'peus va c'hrouet
 'Vit an envou.

2.
 'Baoe pell amzer
 Kovez 'ran ouzoc'h,
 Ez oun, va Salver,
 Siouaz! eur pec'her,
 Ez oun, va Zalver,
 Enebour d'eoc'h.

3.
 Allaz! me 'zo bet
 Betek breman,
 Kalz re galedet
 E'harz va fec'hed,
 Kalz re galedet
 Chench a rankan.

4.
 E dreid 'zo gwriet
 Gant an tachca,
 E gorf dispennet,
 E benn kurinet,
 E gorf dispennet
 Gant ar fouetou.

5.
 Pignomp, va ene,
 War ar C'halvar,
 Gwelomp eun Doue
 Leun a garante
 Gwelomp eun Doue
 Leun a c'hlac'har.

10.
 Jezuz, o gened
 Bepréd nevez,
 Poent eo ho karet,
 Salver benniget,
 Poent eo ho karet
 E gwirionez.

43. — KANTIK FIN AR MISION

1. Kavet am eus ar peoc'h hag an aürusted,
 Yac'h eo breman ha laouen va ene;
 Dindan va zreid an ifern a zo klozet;
 Dreist an oabi glas, me 'wel digor an Nenv.

Diskan

O va Zalver, hirio, warc'hoaz ha bemdez,
 Ra vo meulet hoc'h nado dudius!
 Er mision am eus kavet ar vuhez;
 Bennoz, bennoz, mil bennoz d'eoc'h, Jezuz! (bis)

2. Em gwazied ar gwad o redek freskoc'h,
 Ne grenan mui terzienn ar gwall-dechou,
 Va c'halon baour ennoun 'zo deut yaouankoc'h
 Deut 'z eus d'in nerz da garet an Aotrou.
3. Pegen doue eo tanva ar wir garantez,
 Meuli Doue, hor C'hrouer, hag hon Tad!
 Anaout karet, setu dudi an Elez,
 Setu ive dudi ar c'hristen mat.
4. Diouz ar pec'hed e kimladan da viken,
 Ne fell d'in mui hada danvez daelou.
 War an hent fall ne gaver nemet anken,
 E leton flour a zev evel ar glaou.
5. Salver Jezuz, va ene ha va c'halon
 Ne glaskint mui nemedoc'h da Aotrou;
 Va c'horf ivez, keit ha ma vo ac'hanon
 A vezo d'eoc'h gant e holl skianchou.

44. — O KALON ZAKR

1. O Kalon Zakr, Kalon Jezuz,
 C'houi 'zo meurbet karantezpz;
 Pljet selaou ar pedennou
 A zav a-greiz hor c'halonou.
2. C'houi eo ar feunteun virvidik
 A daol grason ken pinvidik,
 A resevomp da bep mare
 Hag a zo tenzor hon ene.

3. O Kalon Zakr, c'houl' zo eun nor
Hag a welan bepred digor
Da zigemer ar bec'herien
A glask ober gwir binijenn.
4. Bet oun, siouaz ! o va Zalver ;
Dianaoudek en ho kenver,
Distrei a ran a galon vat,
D'ho meuli, d'ho trugarekaat.
5. Torret am eus lezenn Doue,
Kant ha mil gwech 'hed va buhe ;
Ouzoc'h Jezuz, oun bet fallakr,
Treuzet am eus ho Kalon Zakr.
6. C'houl, Pastor mat, ho peus klasket
An danvad paour a oa kollet,
Setu ken o c'houlenn pardon
Digorit d'ezan ho Kalon.
7. Stoutet holl betek an douar
Hor c'halon rannet gant glac'har,
Kriomp gant eur vouez truezus,
Pardon, pardon, Kalon Jezuz !
8. Pardonit d'eomp-ni, kristenien,
An diegi, ar yanijenn
Hon eus diskouezet, keit amzer,
D'oc'h e Sakramant an Aoter.
9. Pardonit c'hoaz an tordejou,
Dismegansou ha blasfemou,
Kement pec'hed a ra benvez
An dud difeiz ha divadez.
10. Me garfe gant va gwalec'hi
Va fec'hejou, va fallou,
Glac'haret o sonjal enno,
Me 'duelo betek va maro.
11. Daoulinet en hoc'h ilizou,
E rin gant doujans pedennou ;
Allez er gomunion
Ho tegemerin em c'halon.
12. An oferenn c'hoaz a glevin,
Ken allez ha ma c'hellin,

Evit kinnig, gant priz ho kwad,
Ar zakrifis santel d'ho Tad.

13. Kemerit ivez evit kred
Kalon ho Mamm, zo bet treuzet
E'harz ar Groaz gant seiz kleze,
Dre nerz dispar he c'harante.
14. Unanomp holl breman hor mouez
Evit kana gant karantez ;
Gloar d'ho Kalon, Salver Jezuz !
Gloar d'ho Kalon, Mamm druezus !

50. — D'AN AOTROU KRIST ROUE

Diskan

Enor ha gloar da Vab Doue !
Ne fell d'eomp kaout Mestr na Roue
Nemet Jezuz 'pad hor buhe.

1. Galloud an den a zo bihan ;
Teuzi a ra teuzi buan,
Evel ar c'hoar dirak an tan.
2. Pelec'h aman ar rouaned
'Zo bet gwechall kement brudet ?
Emaint pell 'zo 'barz ar vered.
3. Galloud Jezuz a jom atao,
Krenvoc'h eget ar gwec' dero,
Treo'h d'an avel a stourm outo.
4. Jezuz a dle beza Roue,
Pegwir ez eo Den ha Doue,
Mestr e pep lec'h e pep mare.
5. Kals tud difeiz o deus kredet
Ober d'ezan brezel kalef ;
'Giz deliou sec'h int bet skubet !
6. Roue an holl e tie beza,
Pegwir en deus, 'vit o frena,
Shuilhet e wad, hep marc'hata.

7. Klevit e gomz : « Roue me 'zo,
Roue bepred me a vezo,
Ha def ebet n'am diskaro ! »
8. Poblou ar bed, eus a bep gouenn,
Meien pe ruz, pe lzu pe wenn,
A die senti ouz e lezenn.
9. Na laromp ket, 'vel ar Yuzeo ;
« Ne fell ket d'eomp dougen e yeo ! »
Trei kein d'ezan, na spontus eo ! »
10. Trec'het en deus e lein ar Groaz,
War an Aoter trec'hi 'ra c'hoaz,
Roue ken mat n'eus bet biskoaz.
11. Diskenn a ray, da fin ar bed, *
Leun a c'halloud ha leun a sked,
Da varn an holl 'giz ma vo ret.
12. Karomp ervat Jezuz-Doue,
Karomp ervat Jezuz-Roue,
Ha ni 'reno gantan ive !

52. — PEDENN VERR D'AR GALON ZAKR

Kalon Zakr va Jezuz, ra vlot Roue warnomp !
Kalon Zakr va Jezuz, me 'gred e karit ac'honomp !
Kalon Zakr va Jezuz ho pet truez ouzomp ! (Dis)

53. — ADOROMP HOLL

1. Adoromp holl e Sakramant an Aoter,
Doue kuzet, Jezuz, hor Mestr, hor Zalver,
Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,
Gant karantez a dan msulit-hen deiz ha noz.
2. Gwir Vab Doue, en em c'hraet den d'hor prena,
En osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga ;
Plijet ganeoc'h skuilha, eus ho tron an aoter,
Warnomp daoulinet aman ho pennoz, va Zalver.

3. Enor ha gloar ha karantez da Zoue :
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Sperez Santel ive ;
Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien
Aketus d'e veuil hirio ha da viken.

54. — A-VREMAN BETEK AR MARO

1. A-vremanbeteq ar maro,
Meulomp Jezuz-hag e hano,
Ra vo karet e pep amzer
Hak adoret war an aoter.
2. Va Jezuz, dre ho Pasionn,
Shuilhit grasou en hor c'halon,
'Vit ma c'hellimp 'pad hor vuhez
Ho servicha gant karantez.
3. Trugarez d'eoc'h, o Va Aotrou,
Evit hoc'h holl vadelezoù ;
D'eomp holl breman roit ho pennoz,
Evit hor c'has d'ar Baradoz.

57. — O SAKRAMANT BURZUDUS

1. O Sakramant burzudus,
Lec'h omp maget gant Jezuz :
Bunan eman hor Zalver,
Kredi a ran war e c'her.

Diskan

- Adorom Doue,
E Sakramant e garante !
2. Jezuz, d'an noz 'raok mervel,
Ro galloud d'an Ebestel
Da jench ar bara, ar gwin
'N e gorf hag e wad divin.
 3. Ar beleg, d'ar gorreou,
A lavar e wir gomzoù,
Ha raktal Jezuz-Salver
A ziskenn war an aoter.

4. Hep tec'hout diouz an nevou,
E teu war an aoteriou,
Hag e chom ganeomp noz-de,
Dalc'het gant e garante.
5. N'eus mui na gwin na bara,
N'eus nemet Jezuz aman,
E gori sakr, e wad divin,
'Lec'h ar bara, 'lec'h ar gwin.
6. En osti n'her gwelomp ket,
Kuzet eo 'giz eur spered,
E pep tamm a-bez eman,
Hep na c'hellfed e ranna.
7. Neb a ya d'an daol santel
E stad a bec'hed marvel,
Gwir Judaz, traitour euzus,
A ra eun torfed spontus.
8. Neb a ya pur e galon
A gav eun tenzor gwirion,
Gant buhez Salver ar bed,
E vuhez 'vo unanet.
9. Adoromp hor Roue bras
En nevou ha war ar groaz,
Adoromp hor gwir Zalver
E Sakramant an Aoter.

64. — ANTOU AROAK KOMMUNIA

1. Kredi a ran, o va Zalver,
En em gavit war an aoter,
Dre an osti, Doue gwirion,
C'houl a ziskenna en c'halon.
2. Met p'oum me, o va Zalver,
Evit kredi ho tigem?
N'oum ken nemet fallagriez,
Ha c'houl zo leun a zantelez.
3. Sellit sellit ouz va daelou,
Pardonit c'hoaz va fec'hejou,
Eur gomz hepken, Aetrou Doue,
Ha va ene a vo pare.

4. Daoust d'am buhez nebeut kristen,
E fell d'in mont en ho kichen,
Fizians am eus, o va Jezuz,
C'houl a zo ken karantezus.
5. O va Zalver, na me ho kar!
'Vidoun oc'h bet war ar C'halvar,
Oc'h bet er groaz teir eur amzer,
Hag e choimit war an aoter.
6. O va Jezuz, na me ho kar!
Dreist an holl draou war an douar!
O va ene, redomp founnus
D'en em vaga ouz taol Jezuz.

59. — O ELEZ AR BARADOZ

1. O Elez ar Baradoz, sellit war an aoter,
Ha gwelit pebez enor a ra d'eomp hor Zalver,
Eur wech evit hor prena eo bet en em c'hraet den,
Ha bemdez 'vit hor maga eus an nenv e tiskenn?

Diskan

- Mari, gwir Vamm da Zoue, Mari, va Mamm dener
Va zikourit da reseo ho Mab ha va Zalver,
Me ne d-oun, siouaz! netra, netra nemet pec'hed,
Met enno'h am eus fizians, o va Mamm benniget.
2. Krouer an nenv, an douar, Doue holl c'hallouder,
A ziskenn war an aoter dre gomzou ar beleg,
Eun Doue kals uheloc'h eget an holl stered,
Dindan spesou ken dister a zo nem izelê.
 3. An Doue a jom atao er memez stad eurus,
Hag a zougar bed krouet war half e zorn nerzus,
En em lez dre ar beleg da veza dougennet,
Evit diskenn e kalon ar paoura zo'er bed.
 4. O burzud ar souezusa e-touez ar burzudou,
O burzud ha c'hell kompren ar c'haera sperejou!
Evit gounit kalonou ho pugale divat,
Ho magit, o va Jezuz, gant ho korf hag ho kwad.

5. 'Vit he mab muia karet, ar Vamm an denera
Biskoaz ne zantas kement he c'halon o tomma.
Goude ken bras karantez, a! piou c'hellfe miret
Da ouestla d'eo'h e galon, va Jezuz benniget!
6. Mar deo dister kalonou ar Zent hag an Elez
Evit karet eur Doue ken din a garantez,
Penaos e prizit, Jezuz, dre ar gommunion,
Eus hor c'halo-nou sklaset dont da ober ho tron?
7. Penaos kredi azeza ouz taol ho karantez,
Goude beza disprizet ho lezenn alies?
D'ho taoulagad, va Zalver, n'hon eus ken da ginmg
Nemet kalonou saotret, kalonou reuzeudik
8. Koulskoude, pa lavarit tostaat ouz ho panket,
Gant eur gomz a drugarez pardonit hor pec'hed.
Teuzit sklaz hor c'halonou gant tan ho karantez,
Neuze ni ho resevo gant joa, gant drugarez.
9. Prestit d'in ho tiouaskell, El-Mat karantezus,
Ma nijin evel eur goulm stre divrec'h Jezuz!
Eno, kalon ha kalon, er peoc'h hag er gwasked,
Me a ziskuizo laouen e barr an eürusted.

65. — AKTOU GOUDE KOMUNIA

1. O va ene bezomp eürus!
Enanomp breman eman Jezuz.
Warnomp huan prennomp an nor,
Ha chomomp sioul gant hon tenzor.
2. War va daoulin stouet izel,
Me hoc'h ador, Salver santel,
Me hoc'h ador, Den ha Doue,
C'houl eo va Mestr ha va Roue.
3. P'am eus ar c'hras ken talvoudus
D'ho kaout ganin, o va Jezuz,
Gant levenez me a lavar
O va Zalver, na me ho kar!
4. Ya, n eur dridal e lavaran,
O va Mestr mat, nag ho karan!

- Met ra gresko ennoun bemdez
Tan dudius ho karantez!
5. Mil bennoz d'eo'h, o va Doue,
A zo diskennet em ene,
Met kaer am ho trugarekaat,
N'hellin morse ho meull mat.
 6. Sent hag Elez madeleuz,
Evidoun-me meullt Jezuz.
C'houl, dreist pep tra, Gwerc'hez Vari,
Kanit d'ezan mil meuleudit.
 7. Me a garfe, o va Zalver,
Beza brokus en ho kenver,
Met petra d'eo'h heñfen kinning,
Pa n'oun nemet eur reuzeudig?
 8. Da vihana, o va Doue,
Me 'n em ro d'eo'h korf hag ene,
Da labourat evit ho kloar,
Keit ha ma vin war an douar,
 9. Me a zo bresk, o va Jezuz,
Hag an henchou a zo risklus:
Va skoazellit eta bapred,
'Vit ma kerzin hep lamm ebet.
 10. Grit ma tec'hin diouz ar pec'hed,
'Giz ma tec'hfen diouz an naered.
Ha ma renin hiviziken
Buhez dinamm eur gwir gristen.

68. — KANTIK AR ROZERA
Chapeled a joa.

1. Sonjomp d'ar genta dizenez,
Er joa he devoe ar Werc'hez,
Pa voe gant an El saludet
Da veza Mamm Salver ar bed.
2. En eil mister sellomp Mari
O kuitaat he bro hag he zi,
Evit gwelet Elizabet,
A zouge sant Yann benniget.

3. En trede mister, hor Zálver
Zo ganet en eur c'hraou dister,
Hag a lavar d'eomp distaga
Hor c'halon diouz traou ar bed-ma.
4. Er pevare mister, joa'us,
Ar Werc'hez a ginnig Jezuz;
Ganto ivez, korf hag ene,
En em ginnigomp da Zoue.
5. Er pempet mister ar Werc'hez
A gavas, goude tri devez,
He Mab e-kreiz an doktored,
Leun a furnez hag a spered.

69. — CHAPELED A GEUZ

1. Ar c'henta mister truezus
A ziskouez d'eomp glac'har Jezuz,
Beuzet en eur c'houezenn a wad,
Ha stouet o pedi e Dad.
2. D'an ell mister e voe freuzet
E gorf santel a daolien fouet;
Evit hor pec'hejou mezus
E c'houzany eur boan ken euzus.
3. D'an trede e voe kurunet
E benn sakr hep truez ebet,
Dre eur gurunenn gret gant spenn,
D'hon desprena diouz an ifern.
4. Er pevare mister, Jezuz,
Dindan eur groaz pounner, mezus,
A gerz etrezek ar C'halvar;
Heuliomp-hen holl, leun a c'hlac'har.
5. Er pempet mister, Mab Doue
A ro evidomp e yuhe,
Piou a vezo c'hoaz ken dic'hrad
Da ofansi Jezuz ken mat.

70. — CHAPELED A C'HLOAR

1. Er c'henta mister glofius,
Kanomp meuleudi da Jezuz:
Sevel a ra beo eus ar bez,
Hervez e gomz, goude tri dez.
2. Jezuz en ell mister a c'hloar
A zeu da guitaat an douar;
Sevel a ra d'ar baradoz,
Eho eman ouz va gortoz.
3. En trede mister, me a wel
O tiskenn war an Ebistel
Ar Spered Santel eus an neny,
D'ober anezo tud neve.
4. D'ar pevare mister, Mari,
E-kreiz ar joa, ar veuleudi,
Korf hag ene a zo douget
D'ar baradoz gant an Eled.
5. D'ar pempet, e voe kurunet
Mari hor Mamm gant an Dreinded,
En neny, Rouanez an Ele
A gar bepred he bugale.

72. — AVE MARIA

1. Ni ho salud, o leun a c'hras,
Ar zantela zo bet biskoaz,
Mari,
Ar zantela zo bet biskoaz.
2. Ganeoc'h bepred eman Doue,
C'houi zo d'ezan korf hag ene,
Mari.
3. Benniget dreist an holl gwragez,
C'houi zo Mamm hag atao Gwerc'hez,
Mari.
4. Benniget eo ive Jezuz,
Frouez santel ho korf evurus,
Mari.

5. Santez Mari, Mamm da Zoue,
Klevit pedenn ho pùgale,
Mari...
6. Pedit evidomp pec'herien,
Breman ha war eur hon tremen,
Mari...
7. Ma z'alimp ganeoc'h d'ar Baradoz
Da veuli Doue deiz ha noz,
Mari,
Da veuli Doue deiz ha noz!

73. — SALVE REGINA

1. Ni ho salud, Rouanez an Elez,
C'houi 'zo hor Mamm, ar Vamm a drugarez,
Hon holl douter, buhez hag esperans :
Ni ho salud gant ar vrasa doujans.
2. D'eoc'h-hu, Gwerc'hez, e kasomp hor pedenn,
Ni divroet ha siouaz ! pec'herien ;
Ouzoc'h, Gwerc'hez, e kriomp er bed-man
Hor c'hlevit-ni, bugale da Eva.
3. D'eoc'h-hu bepred e tenn hor c'halonou,
D'eoc'h e kasomp hor gouelvan, hon daelou,
Hon holl fizians a zo 'n ho madelez,
En draonienn-man leun a dristidigez.
4. Rak-se pa 'z oc'h hon difennourez-ker,
En hor c'henver bepred dous ha tener,
En han' Doue, grit gant ho taoulagad
Eur zell ouzomp, tud paour hag emzivad.
5. Pa zeuy an deiz da guitat ar bel-man,
Hon harlu trist deut an termen d'ezan,
Grit ma welimp ar frouez ho peuz douget,
Jezuz ho Mab, hor Zalver benniget.
6. O Gwerc'hez-sakr, o Mamm garantezus,
Rouanez vat, Itron drugarezus,
Ni hoc'h asped, selaouit hor pedenn,
Ha ni d'hon tro ho meulo da viken.

7. Plijet ganeoc'h, Mamm zantez da Zoue,
Pedi dalc'hmata evit ho pùgale,
'Vit ma c'hellimp kaout perz en holl grasou
Gounezet d'eomp gant Jezuz, hon Aotrou.

74. — AVE MARIS STELLA

1. Ni ho salud Steredenn vor,
Mamm da Zoue, leun a enor,
Gwerc'hez bepred, dor an nenvou,
Selaouit mat hor pedennou.
2. Resevit ar salud santel,
Salud an Arc'hel Gabriel,
E-lec'h an droug graet gant Eva,
Digasit peoc'h d'eomp er deb-man.
3. Torrit chadenn ar pec'herien,
D'ar re 'zo dall roit sklerijenn,
Pellait diouzomp an holl zrougou
Goulennit d'eomp an holl vadou.
4. Diskouezit d'eomp oc'h eur vamm vat
En hor c'henver, tud emzivad ;
Grit m'hor selaou an Hini
Ho peus ganet evidomp-ni.
5. Gwerc'hez dispar e pep doare,
Dous a galon, glan a ene,
Grit d'eomp trei kein da bep pec'hed,
Ha beza dous ha glan bepred.
6. Grit ma vo santel hor buhez,
Ma heulhimp hent ar wir furnez,
Ha ma vimp o welet Jezuz
En nenv ganeoc'h eun deiz eurus.
7. Gloar ato d'an Tad eternel,
D'ar Mab ha d'ar Spered Santel,
Rak da dri Ferson an Dreinded
Ar memes enor a zo dleet.

76. — **KALEDER AN ITRON VARIA**

Diskan

Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz,
Pegen dous ha trugarezus,
Pegen mat ha madelezus!

1. Lavar d'in-me, den an Arvor,
Ha ken kaer eo da vag war vor
Gant he gouellou gwenn-kann digor ?
2. Lavar d'in-me, de nan Argoad,
Ha ken kaer deliou glas ar c'hoad,
Pa zeu eur bann-beol d'o skieraat ?
3. Lavar d'in-me, den an Are,
Ha ken kaer eo lein ar mene,
Gwenn-kann gant an erc'h d'ar beure ?
4. Lavar d'in-me, paotr an denved,
Hag her 'z eus steredenn ebet
Ken kaer en noz steredennet ?
5. Livirit d'in, tud ar maeziou,
Ha ken kaer ez eo glazennou
O'nt-ra gant ar glizennou ?
6. Livirit d'in, bugaligoù,
Er prajou o' kutuilh bleunioù,
Ha bleun ken kaer 'zo er prajou ?
7. Nag en Arvor, nag en Argoad,
Er menez, en oabl nag er prad,
Netra ken kaer, netra ken mat !

80. — **KALON DINAMM MARI**

Diskan

Ave, ave, ave Maria ! (bis)

1. Kalon dinamm Mari,
Leun a garantez,
Ni 'zeu d'ho saludi
Gant an holl Elez;
2. Feunteun an holl c'hrasou
Sellit gant true
Ouz hon holl ezommou
A gorf a ene

3.

Betek e Breiz-Izel,
Gwechall bro ar Zent,
Ouz an Iliz santel
Kals a zo dizent.

4.

Roit d'an den dallet
Gras ar sklerijenn,
D'ar pe'her kaledet
Gras ar binijenn.

5.

En hon tiegeziou
Lakit karantez
Hag en hor c'halonnoù
Peoc'h ha levenez.

6.

C'houi zo Mamm da Jezuz,
Mamm d'ar gristenien,
C'houi zo trugarezus
'Vit ar bec'herien.

7.

Stouet omp d'an douar
Dirak ho Kalon,
Gant keuz na gant glao'har
O C'houienn pardon.

8.

Ennoc'h hon holl fizians
Epad hor buhe
Ennoc'h hon esperans
Er maro ive.

81. — **LAUDATE MARIAM**

Diskan

Laudate, laudate, laudate Mariam ! (ter)

1.

Laudate ! Mamm zantel,
Dreist an oabl skedus
Hor c'halonou fidel
A bigno' joaius.

2.

Ra jomot hor Mestrez,
Steredenn ar mor,
C'houi 'zo hor Rouanez,
Rouanez Arvor.

3.

D'ar pardaez er grasou,
E ti pep Breizad,
Gant Jezuz hon Abtrou
Ho meulomp ervat.

4.

War lein ar menezioù,
Ar pastor denved
War-du bolz an envou
A lavar hepred :

5.

War e vagig dister,
Ar martolod paour
'Lavar d'e Vamm dener,
Gant eur galon aour.

6.
Gant an oad daoubleget
An tad-koz en ti,
Diskabell daoulinet,
N'ehan d'ho pedi.

7.
An eilg mañhuret
En e gavel striz,
Epad ma'z eo kousket
Ho ped en e c'hiz.

8.
Breiziz a-vihanik
Betek ar maro,
O c'halon birvidik,
Laouen a gano ;

9.
E palez kaer Jezuz
Bodet dizourzi,
Eun deiz ni 'vo eürus
En-dro da Vari.

85. — ME A LAKA VA FIZIANS

1.
Me a laka va fizians,
Gwerc'hez, en ho sikour,
Deut 'ta, m'ho ped gant dou-
D'argaz ho enebour. [jans.
Pa skoy va eur diweza,
Me 'bed ho madelez
D'ober 'din mont d'azeza
E-kichen an Elez.

2.
O Mamm leun a drugarez,
O Gwerc'hez benniget,
Hag e pep lec'h ha bemdez
Hor zikourit bepred.
Kinniget d'ho Mab Jezuz
Fedenn ho pugale,
C'houi a zo ken gallouduz
War galon hon Doue.

3.
Gwerc'hez glorius Vari
Repu ar bec'herien,
Me ho ped d'am frealsi
Em spont hag em anken,
C'houi am difenno 'r gwella:
Ho mab 'zo va Roue,
Ar pezh a ra d'in krema,
Va Barner eo ive.

4.
Pa varvin, va Mamm dener,
Pa gultain an douar,
Mirit ouz brec'h va barner
D'am skei en e gounar.
O Mamm leun a vadelez,
Difennit ho pugel,
Ha betek fin va buhez
D'eoeh me 'vezo fidel.

88. — SANTEZ MARI, MAMM DOUE

1. Santez Mari, Mamm Doue, e pep amzer Gwerc'hez
Jezuz a zo va Roue, ha c'houi va Rouanez.
Evel ma'z eo va barner, bezit va patrona,
Hag evidoun dirazan bezit alyokadez.

2. Etouez ho servicherien me ho ped d'am reseo,
Ho servich 'zo dous meurbet, hini ar bed c'houero,
Rak-se paouez d'ho karet, trei kein d'ho preuriez,
A ve dilezel a-grenn hent ar zilvidigez.
3. O Gwerc'hez, d'eoeh e touan beza korf hag ene,
Nétra enep hoc'h enor ne c'houzanvin morse,
Ne lezin den en dro d'in, ma c'hellan, d'ho poania,
Da boania Mamm za Zalver ar Vamm an denera.
4. Evit enor, gwelloc'h hoc'h hano dous meurbet,
O Mamm ar wir drugarez ha Mamm Salver ar bed,
'Vit ar beorien ezomtek me 'vo madelezus,
Dre ma'z int holl breudeur d'in, dasprenet gant Jezuz.
5. 'Hod va buhez, em labour, va zikourit bepred,
Dreist-holl e pred ar maro, a! n'am dilezit ket,
En ho taouarn d'am Barner ma tougit va ene,
Sur ez in d'ar Baradoz d'ho meul goudeze.

SANT FIAKR
Patron Karet Pont-ar-C'hastell

(War doue Kantik Rumengol.)

1. Greomp en eur gana eur bedenn
Da patron al liorzerien,
Sant Fiakr en deus eur japel
Savet e traon Pont-ar-C'hastell.

Diskan

- Aotrou Sant Fiakr, hor patron
War liorzerien Bro-Leon
Hag o labouriou tenn meurbet,
Taolit ho pennoz, ni ho ped
2. Er bloavez 600, pe wardro,
E teuas Fiakr en hor bro,
Eus en Iwerzon, hanvat kent
Gand hon tud koz, Enez ar zent.
 3. Evel cleiz a venec'h all
Oa deuet glask en hor Bro-C'hall

- En eul leac'h distro, eun dachenn
'Vit en em rei d'ar binijenn.
4. Gantan eur rummad yaouankiz
Tost da gear Meaux ha da Bariz,
En doa digant eun eskop mat
Bet eun tamm douar en eur c'hoad.
 5. Eno diskaret gwez uhel,
Abarz nemeur an dud santel
A lak' war zav eur Manati
D'ober lojeiz ha da bedi.
 6. An dachenn Hiskulz labouret,
Toet dizroet ha trempet
Dizale sav en douar biod
Frouez ha bleuniou a bep mod.
 7. Ar plant ha frouez 'zo a-re
A zo d'ar boerien ar c'hontre :
Bennoz, mil bennoz, emezo,
Providans Doue 'zo er vro.
 8. Er chorniou-tro, e sav bleuniou
Eus a bep seurt hag a bep liou
A garg al liorz a c'houez vat
A ra dudi an daoulagad.
 9. Fiakr a oar n'eus ket hepken
Eur c'horf da vaga pep den
Setu ma kar bemdez ive
Rei magadurez d'an ene.
 10. Kentellou sakr an aviel
Diskleriet gant an den santel
A zesk d'an holl eo da genta
Red karet Doue dreist pep tra.
 11. Pa vez ar mare da repoz
Deut war ar bed mantel an noz
Ar zant a jom da bedi c'hoaz
Daoulnet war an douar noaz.

12. Meulomp, Enoromp da viken
Ar venec'h hag an eskibien
O deus gwechall grêt e pep giz
Kement a vad d'hor c'henvroiz.
13. Goude m'en deus hir vloaveziou,
Bet roet skouer e vertuziou
Fiakr a veritou karget,
A zav da liorz an dreinded.
14. Kerkent e teuer da bedi
War en vean-bez er Manati
Ha bemdez war a relegou
E tigouez bep seurt burzudou.
15. Prinsed, eskibien a bep oad
Eus a bep tu, deu war o zroad
Hag en o zouez er penn kenta
E weler an dud santela.
16. Prof ar pinvidik hag ar pacour
A zav dizale eur bern acour
Danvez diober eur relegouer
Kaeroc'h eget d'eun impalaer.
17. Setu hen tronet en Nenvou
Ha savet war an aoteriou,
Ha setu deut e Breiz-Izel
E vrud betelo Pont-ar-C'hastell.
18. Dezan hon tadou a zavaz
Eur japel tost d'eur feunteun c'Hlaz
Eur japel ha deomp ni a dalv
Koulz hag eun ilis katedral.
19. D'hon ilis parrez pa c'hellomp
Iaouen da zil ha gouel ez eomp
Met pa vez prez ni oar ema
Chapel Sant Fiakr da dosta.
20. Guschall dreist oll oa falvouduz
Pa oa tud lor ken truezus.

Dre eur prenestik ec'h heulien
Sakrifiks sakr an offerenn.

21. Hirio pa glêv tud ar c'harter
Kleier an tour ouz o gelver
A glêiz a zeou vezont gwelat
Da Pont-ar-C'hastell o redet
22. Aotrou Sant Fiakr, eus an Nenv,
Deskit d'eomp holl karet Doue
Kinnig d'ezan holl labouriou,
Hon nerz, hor poan, hor pedennou.
23. Tachennou bras ha re vihan
A c'houlenn labour hep ehan,
Roit d'eomp nerz d'o labourat
Evelloc'h-c'houi a galon vat.
24. Digasit d'ezo gliz an Nenv
Hag an heol tomm pa vo 'r mare.
Evit ma tougint drevajou
Bevans d'hon holl diegesiou.
25. Ha pa vimp galvet gant Doue
Grit ma vimp dizamm a bep die,
Evit ma plije d'hor barnet
Hor c'has raktal en ho kenver.

**KANTIK EN HENOR DA ITROUN VARIA
AR RE GLANV**

1. O Gwerc'hez Santel, mam da Jezus,
Grit eur zell ouzomp, ni ho ped,
Hag ouz hor stad bezit truezus,
Rag hor buez trenk meurbed.

Diskan

Santez Mari, Gwerc'hez venniget,
Pedit evidomp pec'herien.
Dindan sam hor poanour daoubleget,
Klevit mouez ho pardonerien.

2. Doue 'n doa krouet an den eurus
E liorz Eden, ha padal
Eo rej d'eomp gouid er bed poanlus
Hor bara diouz c'houezen hon tal.
3. Gwan eo hor c'horf, diser hor yec'hed
— Gwerc'hez Vari, ne glemmomp ket —
Ar boan a zo digouez ar pec'hed,
Ha ganeomp ez int deut er bed.
4. War hent ho mab, dre ma tremene,
Gwechall pa veve touez an dud,
An dal a wele ar c'ham a gerze,
Ar gomz a deue d'an den mud.
5. Reia re a d'ar pouzar ar c'hleved,
Glandet ar c'horf d'ar paourkeaz lor,
Hag an den seizet gant e c'holc'hed,
Vatce stany dreist treuz an nor.
6. En eur vudal an drouk sperejou
Aziskroge trum euz o freiz,
Hag ar maro zoken d'e gomzou,
A rent d'e vammhe mabig kelz.
7. Hirio ni a c'houlenn ho skoazel,
Mam hor Zalver gant fiziañz krenv,
Ni guask goude dindan ho kazel
Rag c'houi zo galloudiz en nenv.
8. C'houi zo pareans ar planvourien,
Gwerc'hez Vari, mez gwelloc'h c'hoaz :
C'houi a zo gwarez ar pec'herien
A stagas ho mab euz ar groaz.
9. Dre ho torn e teu an oll grasou
Evit ar c'horf hag an ene,
C'houi a zo hanvet dor an nenvou
Porta caeli, mater, Ave.

129. — AOTROU SANT PER

Diskan

Aotrou sant Per, hor zant Patron,
Kreskit hor feiz, hon nerz-kalon,
Ma vezimp holl gwir vugale
D'an Iliz savet gant Doue.

1. Pesketour lenn Jenezareth,
Gant hor Zalver pa 'z eo galvet
Da zevetei an eneoù,
Raktal a lez e rouejeoù.
2. E feiz 'zo krenn, ha d'hor Zalver
Oc'h embann mister an Aoter,
E lavar : « C'houl, ha c'houl hepken,
A ro d'an dud gwir sklerijenn, »
3. Kalz n'anavezont ket Jezuz
Daoust d'e oberou burzudus,
Simon a lavar koulskoude
« C'houl eo ar C'hrist, gwir Vab Doue. »
4. Ha Jezuz d'ezan a respont :
« Te a zo Per, ar gwir maen-font,
A vo glazezet warnan
An Iliz santel er bed-man. »
5. « Te 'vezo prins an Ebstel
Ha kenta Pap an dud fidel,
Eus rouantelez an Nenvou
Me roio d'it an alc'houezioù. »
6. E garantez a zo dispar :
Na tud, na madou an douar,
Netra outan n'en deus miret
Da vont da-heul Salver ar bed.
7. M'en deus nac'het eur Mestr ken mat,
Evit an pebez kalonez !
Gant daelou puilh 'hed e vuhez,
E verk glac'har ha karantez.

8. Ha pa vo diskennet warnan
D'ar Pantekost ar Spered Glan
Raktal ez ay d'an eneoù,
D'o zaveti a viliadoù.
9. Ar balaned, ar Juzevien
A zepp da veza kristenien :
Na poan, na trubuilh, na prison,
Netra ne drec'h e nerz-kalon.
10. It o sant Per, breman da Jom
Fell douz ho pro, da gêr vras Rom,
D'ar gêr a vo kêr-benn ar bed
Gant gwad hor Zalver dasprenet.
11. Goude labourioù ugent vloaz,
D'ho tro c'houl 'varvo war eur groaz;
Met diwar gwad ar verzerien
E savo danvez kristenien.
12. Savit d'an neñv Pastor karet !
Eno, gant Doue krunet,
A l. kendalc'hit da rei skoazell
Gant ho pedenn d'an dud fidel.

T A O L L E N N

Adoromp holl		21
Ardeman betek-ar maro		25
Angelus	5 et	6
Aktoù		8
Bezit laouen evit ato		6
Chapeled a joa		29
Chapeled a geuz		30
Chapeled a c'hoar		31
Da feiz hop tadou koz	12 et	13
D'hor Mamm santez Anna	11 et	12
Direit holl d'an taclennoù		15
Doù gwit bried		20
Eurus an hini		9
Hun Doue a zen d'ho kervel		13
Enor tha gloar da Vab Doue		23
Gouic'hemennoù Doue an Iiz	4 et	5
Gwez an Ifern		17
Gwez ar Bunkator		17
Gwez ar zul		10
Kantik an henor da Itronvaria		40
Kantik ar Baradoz		18
Kantik Sant Per		42
Kavet am dugar peoc'h		21
Kalon zakr va Jezuz		24
Kredi arden va Zalver		26
Kalon dinamm Mari		32
Naudate Mariam		35
Me a laka va dizians		36
Mondomp holl		9
Me zo Kristen		11
Ni ho salud o leun a c'hras		31
Ni ho salud Rounez an Ilez		32
Ni ho salud eteredenn vor		33
O Kalon Zakr		21
O Sakramant burzudus		25
O Ilez ar Baradoz		27
O Vagene bezomp eurus		28
Pa zaoulinomp evit kovez		19
Pegen draer ez eo Mamm Jezuz		34
Pedenñ diouz ar muntin		3
Pedenñ diouz an noz		7
Poen ez eo deoc'h peo'her		14
Sant Blaz		37
Santez Mari Mamm Doue		36
Tremen va pep tra		16